

Kronikenn 6

AMZER, BRAGOÙ GLAS, LUC'HED, KOUMOUL, RADIO HA SIMFONIENN ZAHO

Herie bremañ en deus sant Erwan gwisket e vragoù glas, da lâret eo eo digoc'henn an amzer !
Souezhus a vo respontet din, ya, rak pegen gwir e teu dimp ar pevar amzer en korf ar memes devezh.
Abalamour da se em eus skrivet « bremañ » ! Amzer din echuiñ ma skrid hag e vefomp gant glav, pe
avel, pe arnev pe... amzer kaeroc'h c'hoazh, pe me oar me !
An amzer a oar korboniñ prim, sikouret gant an avel-dro. Duadennoù o tont eus ar mor, pe eus ar reter,
pe... Diouganiñ an amzer zo unan eus an traoù diaezetañ en hon c'harter.
Met ne ra forzh, rak an dud, amañ, a oar e ranker ober diouzh an amzer zo. Ha koulskoude eo ret
tapout krog en stumm an amzer daonet-se paneve evit gallout saludiñ e amezeien ! Ya, penaos e
rafemp ma ne vije ket eus an amzer cheñch-dicheñch-se evit lañsañ ar gaoz ! Evel-se :

- O vont 'vêr ?
- Tomm an amzer 'c'hat !
- Ma, korboniñ a ra... 'vefomp ket pell o kêt barradoù arnev... ha kurunoù !
- Ha luc'hed da heul, me 'lâr deoc'h !

Dre chañs emañ aze ar radio evit kas keloù dimp eus an amzer a ra. N'eus ket keit-se c'hoazh, diouzh
ar beure, abred, e veze selaouet ouzh unan war Radio Breizh-Izel, staliet e Kemper-Kerne, kement ha
kaout ar blijadur da resev keloioù a-bep seurt eus ar bed hag ivez, evel just, keloioù eus an amzer o ren
a-us dimp. Keloioù a-berzh ur Planielad, staliet du-hont en Kemper : reoù Gi ar C'horr. Niverus daonet
e vezemp o c'hortoz kaout hon c'heloioù avat ! Gantañ e veze founiset ar gerioù hag an troiennoù da
voulc'hañ an devezh... Stumm an amzer, stumm ar glav, hini an avel, hini ar c'houmoul, stumm ar
mor, ha kement zo. Tre evel pan vez ezhomm anezhe pan vêt war gaout an dud !

Hag ar frioù kurius neusont c'hoant da c'hoût penaos emañ kont en tu all d'ar c'houmoul ? Da c'hoût
petra eo liv an amzer du-hont ? Da c'hoût petore bed zo du-hont ?
Petra da ober 'ta ? N'eo ket a-walc'h heuliañ liv bragoù sant Erwan a lâran.
Ret eo dezhe, evel ma ran-me, mont da heul plac'h yaouank marzhus Sant-Nazer, Zaho de Sagazan pa
gan he simfonienn al luc'hed. Komzoù fresk ur varzhez, frealzus, hunvreüs, tener ha leun a denelezh :

Bepred e vez kaer
a-us d'ar c'houmoul
Met, ma vefen-me un evn
ec'h afen da zañsal dindan an arnev
E treuzfen ar c'houmoul
evel ma ra ar gouloù
E selaoufen dindan ar glav
simfonienn al luc'hed

Adal he oad tenerañ
ne ouie
Komz nemet en ur c'harmat izel
Daoust dezhi klask o derc'hel
Ar garmoù hag an daeroù-se
hag a lakae anezhe kement...

Bepred e vez kaer
a-us d'ar c'houmoul
Met, ma vefen-me un evn
ec'h afen da zañsal dindan an arnev
E treuzfen ar c'houmoul
evel ma ra ar gouloù

E selaoufen dindan ar glav
simfonienn al luc'hed

Deuet bras netra sioulaet
Korwentenn vihan he deus kavet
Abegoù da ober kement a c'hlav
Piv a c'hallfe he c'haret da vat
Den na blijfe dezhañ en em gavout
En-kreiz ur gorwentenn anzavit
Abegoù zo evit gouelañ
Abegoù he deus nemet

Bepred e vez kaer
a-us d'ar c'houmoul
Met, ma vefen-me un evn
ec'h afen da zañsal dindan an arnev
E treuzfen ar c'houmoul
evel ma ra ar gouloù
E selaoufen dindan ar glav
simfonienn al luc'hed

P'he deus gouvezet ar gorwentenn
E c'hall hesonerezh
Tec'hel diouzh an avel
Hag en em gavout
En kalon an dud
E kave dezhi

N'eus ket da aviañ an heol
Me lako an dud da zañsal
Diouzh lusk ma gouelvan
Barradoù ma c'han
A deuio da dommañ o c'halonoù
Da dommañ ma c'halon-me.

Bepred e vez kaer
a-us d'ar c'houmoul
Met, ma vefen-me un evn
ec'h afen da zañsal dindan an arnev
E treuzfen ar c'houmoul
evel ma ra ar gouloù
E selaoufen dindan ar glav
simfonienn al luc'hed

(Troet ganin hag embannet gant aotre hegarat Zaho de Sagazan, trugarez vras dezhi. Trugarez vras ivez da Joran ar C'horr ha da Gi ar C'horr. Trugarez ken bras all da Vertrand Yeurc'h).

Levrlennadur berr ha lec'hiennoù

Menard, Martial, Pennadoù Sul / Chroniques bretonnes, Al Lanv, 2021, p. 883.

Devri : bragoù <http://devri.bzh/dictionnaire/b/bragou-1/>

Albom sonerezh Zaho de Sagazan :

Zaho de Sagazan, La symphonie des éclairs, Disparate, 2023.

Da selaou : https://www.youtube.com/watch?v=pqo59FkF_5g

Diwar-benn Gi ar C'horr hag ar c'helioù brezhoneg :

<https://www.letelegramme.fr/bretagne/portraits/france-bleu-breizh-izel-guy-le-corre-33-annees-de-journalisme-en-breton-31404.php>

<https://www.francebleu.fr/emissions/c-est-arrive-pres-de-nous/breizh-izel/guy-le-corre-les-69-ans-de-l-ex-journaliste-bretonnant-de-rbo>

<https://www.ouest-france.fr/bretagne/guy-le-corre-33-annees-sur-les-ondes-en-breton-3828823>